

An disput etre ar martolod ag ar labourer douar

War don : *Ils ont des chapeaux ronds*

1

Didostet compaignonnez ha houi klevo kanan
En disput a zo zavet hen tre daou zen aman.

REFRAIN

*Ils ont des bérêts blancs, vive la marine,
Ils ont des bérêts blancs, vive l'océan.*

2

En disput a zo zavet en tre eur labourer
Ag eur martolod yaouank zo arru er ger.

3

Eur labourer da gentan gonmanças riotal
Met resevet mad he bet a diguemeret fal.

4

Tud ar mor a zo decidet a capable da zisput
He ra da labourer torchou he veg dont war he glud.

5

Eur martolod he brao deza he lavar eur labourer
War eur mor he voyagi n'a neuz netra d'ober.

6

Ha me a renk labourat deuz er beure beteg an noz
Deuz en eil zul de guile na meusket ar repos.

7

Mar feuz te poan labourer na neket dre ma fot
Kar peb hini a hanomp e gleo kavet e lod.

8

Par vez te labourer nez kouele kousket mad
Me ve war veg ar wernen a vranskellad.

9

Didan ma zreid a krozal eur mor spontus meurbed
Ag hus din pa zellan ne wellan med stered.

10

Me glev hannout martolod mez ne ranket a van
Ne gredan ket houlez kavet re hol e boan.

11

Te zo krennan diviniou hag he woalhi de zent
Gant ambarrassou hisse me he me kals e fent.

12

Te zo langage divalo gannit labourer kez
Kredan ket feuz sortiet biskoas dimeuz de nez.

13

Ah me zo bezet alies he barz en kreiz en noz
Klevet eur mor o krozal gant e vouez rus a groz.

14

He resev er gwoal amzer war bont me batiment
Ebars kreis er goanv kallet ne ket interressant.

15

Me gredan ket martolod he gwir pez he larez
Mez kredi ran gouelloch he ve mad pez a tebrez.

16

Te zo fechet a nipet leun a e'hloar ag a stad
Tud gan kemenze drechou warran ket labourad.

17

Gwellet e ran mad labourer n'outket intelligent
Mar zonjez heb labourad meuz me boued ag arc'hant.

18

Kar nimp meump tout micheriu ag en disteran nez
E zo kals difficiloc'h evit de hini te.

19

Ze zo gevier martolod tout pez e feuz larret
Kar micher er labourer zo poanniuze a kallet.

20

Ha te zo gwall digourdi scanv a liger da har
Vijez ket bet e hisse a labourat douar.

21

Facile he gout labourer er martolod yaouank
Kustumet war plankon a a kerz liger a stank.

22

Ha pe deu den douar ne chanchaket e vod
He bajou e zo finnoch vit re an deber iod.

23

Tor braz e feuz martolod lavaret quemmense
Kar me zebr iod alies ag zo kent kouls a te.

24

Kars te zoug bars da houdel da fortun a d'hol vad
A me meuz zaout a kezek evid dont dar marc'had.

25

Gant da gezek labourer a gant de zaout ive
Me blij der merchet yaouank gouelloc'h evit out te.

26

Pa kommensan me dansal gant me danserezet
A chomez te da zellat evel eun den estonnet.

27

Gwall zod a gavan er merc'het e lag o honfians
Ebars ar martolodet e haloupat mez ar vranz.

28

A me ve hober me labour tre tal kichen er guer
Er plac'h er vo guaniman devo ket a vizer.

29

Ya pa vez te labourer vutunad barz di
Mi ve bars en estranjour allies o hirvoudi.

30

Mez pa ven gwelet e retorn woar ma brec'h gallonniou
Lavar er merchet yaouank zel aze eun otrou.

31

Henez zo capable da vevan eur vreg hep labourat
Difer deuz ar labourer o tont deuz eun ti mad.

32

Herve lavarez martolod neket fal da vicher
Met me a honne muioc'h evidout hep kuitaad er guer.

Me a douch bars me devez traouwalc'h evit me blavez
Pa werzan louennet yaouank me hel bevan eiz.

Hola ! hola ! labourer boue man ker ar c'hezek
He houed da portemonne kazi evel eun toussek.

Mar dive c'hoas er malheur darruet marc'hat mad
Ker a fo te labourat de yalc'h e hario a blad.

A me e kontinuo da douch bopret ma baye
Me rodou vel eur prefet en touez en otronez.

Plego ran dit martolod ha gwelet e ran ervat
Me zeod ne zervijket met din da non lipad.

Deus breman eta labourer hamp devan eur chopinad
A goude en disput man nimp vezo daou gamarad.

Ze ne met eun digare d'ober eur zon neve
De lakaat en dud da c'houarzin a divertissan ne.

DISKAN DIVEZAN

*Ils ont des bérets blancs, vive la marine
Ils ont des bérets ronds, vive la chanson*

Propriété réservée

Composée par Mme LE MANSEC,
née LE FLOHIC AUGUSTINE,
couturière au bourg de Pont-Melvez (C.-du-N.)

